



# DISPUT

## ENTRE AN DOUR HAC AN TAN

---

### **Var un ton nevez.**

Va speret a so geinet, ne deo quet hep resoun,  
O studia va c'bentel hac o clasq ar fæçoun,  
Evit formi un disput entre an Tan hac an Dour,  
Unan ane a zo foll hac un all traitour.

An Dour en deus pretandet e oa ar c'habiten,  
Ne deus netra evintá, na ne vezo biquen,  
Enuez eo an evach hac an necessera,  
Na vezo tud na loenet ma teufe da vanqua.

### *An Tan.*

Beza ec'heus ar gallout quement-se da ober,  
Ne fell quet din resista na doc'h na d'ho pouver;  
Mæs evel ma ve formet gant ar bleud ar bara,  
E ranquàn dont de boazat, pe na dalse netra.

### *An Dour.*

C'hoant ho peus de levaret e oude necesser,  
Ha te ebars ar bed-màn quiriec da vil maler.  
Disolo a res toennou, distrugi oll madou,  
Ne chom netra ez dilerc'h neme' ar vogueriou.

*An Tan.*

Te, gant da draitouraich, a barlant diresoun,  
Ha ne laboures jamæs nemet dre draisuon :  
Lonqua res batimanchou, hac iy carguet a zen,  
Hac, en ur moment goude, e teuez calm ha plen.

*An Dour.*

Caër ho peus ma dicria, e ranques plega din ;  
Pa ho eus c'hoant da gregui, quentre ma er santin  
E allàn rectal ho mouga hac ober deoc'h mervel  
Hac ouспен-ze hoc'h ampeich da gallout mui sevel.

*An Tan.*

Abalamour ma peus bet digant Doue pouer,  
Ez out ur vantezonner hac ur mæstr marvailler.  
Caër ho peus, en oll boenchou, donet d'en em venti,  
Quent ma vo fin d'hon disput e c'hallin em vengi.

*An Dour.*

Estonet oun, va mignon, da clevet ho comzou ;  
Goude beza recevet quement a bouariou,  
Et ranquin coll gant un dra ne ra nemet maler,  
Ha ma laquet da veva ar bed-oll en antier.

*An Tan.*

Formi a rez ar bevañç hac ar cheriou mad ;  
Ober a rez ar souben hac ar bouet dilicat :  
Anzaf a ràn e ma oud, ez-sur, ar poent quenta,  
Mæs me, o lont d'o poazat ; oun an necessera.

*An Dour.*

Hep doun ne ve en douar nemet tud payanet,  
Na ve na badiziant, nac oferen ebet :  
Bemdez, evit e laret, plega din e ranquer,  
Ha memeus, da vadezi, pep veich a ma deuer.

*An Tan.*

Ha me zalc'h beo ar goulou, da rei sclærigen :  
Da ober vadianchou, da laret oferen,  
Hac epad ar gousperou a labouràn are,  
Ha partout hon necesser, hac en noz hac en de.

*An Dour.*

Beza em eus ar gallout da dezampouezouni  
Quement zo barz ar bed-mâ, carguet a lousdoni;  
Conservi ràn ar yec'het hac ar prosperite,  
Quercouls dan dud ancien evel dar vugale.

*An Tan.*

Rinç a rez al lousdoni demeus an oll dillad;  
Hounes a zo ur rasoun hac a zo placet mad;  
Mæs caër hoc'h eus o goalc'hi, mar be astur outo,  
E ranquer dont d'o bervi quent dont abenn aneo.

*An Dour.*

Caër ho peus va chicana, me eo ar crea  
Da lacat da brodui quement so er bed-mâ,  
Ha te zo ur traitour, hac un dra execrabi,  
Quement en em fiz ennout a rentez miserabl.

*An Tan.*

Biscoas n'am eus grêt malhier n'am be avertisset  
Rac arauc ma flaminàn e veler ar moguet,  
Hac a re so fonus d'am etouffi soudou  
A lammo, en ur moumed, va buez diguener.

*An Dour.*

Pedir vertuz a zougàn en ur poudat souben :  
D'ar guenta, mar be re sail me er gra dizolen ;  
Mar be re vian e gresq, ha re tom e yeno  
Hac mar deu bea teo, m'en laquai tano.

An Tan, evel ma velas, ne alle en em difen ;  
Ouz an dour, en em laquas da cuza en ur mæen.  
Tennit tan eus an douar ha torrit anezàn,  
Hac, en ur monumend goude, hoc'heus tan dioutàn.

Cetu int camaradet, hac an Tan a goune ;  
Ha ne vo den incredul, var sujet quement-se,  
Un seurt dra a so amprouff gant un nombr bras a dud,  
Ar resoun-màn a æchu entreze an disput.





566 A

# CHANSON NEVEZ

## GROET VOAR SUJET AR CHIMIQ.

Voar don ar Mecanigo.

000194

Me ho supli bretonet d'ober reflexion  
War ar ganaouen nevez gret gant precaoution,  
War sujet ar goall usaj a zo deut en om bro,  
Evit clasq eun ezamant enn certen treo a zo.

P'on dezo e'hoant da danan brema cornedadou,  
Na vo get deomp necesser pelloc'h douguen gouestou,  
Na qen nebeut dirennou 'vit tenna tan gante,  
Pa n'eo guir a zo chimiq, a tanfomp oll hep se.

Ean em gonsolomp eta brema butunerrien,  
Pa n'eo guir on deus cavet, ann dro-ma ar voyen,  
Da beur rosta hon madou gant ar facilite  
Hac a so dreist ordinal, incomprenabl eo se.

Na vefomp pelloc'h forcet da vont breman d'ann nod,  
Evit clasq tan da boac'hat na patates na yod  
Breman gant ar marc'hadour ni a gavou chimiq  
Treo hac a zo conseqant da baour ha da binvik.

Pa vo louzou da devin breman 'bars ar parcou  
Na rencfomp-qet implia ar stoup d'ober mechou,  
Brema gant ar chimiqen ni rei ézet om jeu ;  
Ha m'ar crenv an avel ni yel da goste 'c'hleu.

Fouillet a vo ar mevoel deus noz a deus veure  
Bete gout na ve gantan deus ann daonedo ze,  
Qen util a qen noazus wit quement den ho doug  
Pa na ve qet gantan flamin bepret a ve tan moug.

N'ho deus pelloc'h a repos nac enn noz nac an de  
O sonjal er malheurio a rer gante bemde ;  
Bepret a maing o termal a bepret o crozal  
James potret ar chimiq gante na vo ét ral.

C'hui marteze a sonjo na vo doutañ ebet  
Eun nep guis deus ac'hanoc'h mes n'em dromplan a ret  
Rac ouspen cant goech bemde a vefet bizitet  
Wit goelet a c'hui dougo eur sort amprefanet.

Neus na mad na quision quent ewit finissan  
Pa neus canet eur vates eur mevoel rei breman  
D'he dro c'hoas eur ganaouen quent wit ma finisso  
Ar guentel-man quen charmant gand tad ar verrio.

Primoc'h 'wit eur luheden a lar eur mest mevel  
A tanan ma c'hornedat pa na ra qet avel  
Na non pelloc'h obliget da chom hed an heur  
D'exercin patiantet gouir vignon ar goleur.

Ma mestr a ve o yedal breman bars er parco  
Wit goelet piou a chomo da dapan ho c'hernio ;  
A pa vent pell o tanan primoc'h a ze a fach  
Ouz ar vein hac ar wouesto breman ta me a grach.

Superb, superb ma mignon ho c'heus bet cozeet  
Pa po chimiq da dévouin a ouin bepret sentet  
Devet hingt bars er parco a nompas bars er guer ;  
Bete gout ne laqefac'h an tan eu clud ar yer.